



2° 19

# GUIR BORTRET

AR MERC'HET HAC AR GRAGUEZ.

201409  
BM  
QUIMPER

*Var ton Portret an Intanvezet.*

Me ya c'hoas, mar gallàñ, da ober ur portret,  
Tostait d'am selaou, oll graguez ha merchet;  
Me rayo dêch santout ho tefautou antier,  
Laqet int oll amàn ganéon var-ar paper.

Aon ameus ho speret volach, audacius,  
Calz re vil, calz re bront, ha calz re golerus,  
N'o lézo qet da zantout pelec'h e zoc'h dalc'het,  
Pere eo ar viçou en pere oc'h quezet.

Me zo sur ha certen, ma ve c'houi o guelfe,  
En em goachfac'h buan er c'havarnou nòs-de,  
Er forestiou dounna, elêc'h ne za den ebet,  
En mesq al loëned gouez, tigret ha leonet.

Var defautou re-all digor ho taoulagad,  
Var ho re oc'h-unan e zint sur serret mad;  
Me ya d'o digueri ha d'ober dêch guelet  
Petra oc'h pendaben, pa vec'h examinet.

Eus ar grouadurien an nebeuta parfet,  
Eius en ho corf, fragil en ho speret,  
Icumen an natur, sourcen a valeuriou,  
Mijadur an dud sot a guez en ho laçou.

Adversour ar furnez ermès coulz hac en ti,  
Un dour oll corrompet, feunteun al loustoni,  
Er bed universel, ur monstre eus an natur,  
Un droug so nécessier, ur goustus plijadur.

Ur c'hef eus an ifern , en ilis ur zantez ,  
 Un ael dre ar ruyou , diaoul en tieguez ,  
 Ur big o ragachat en toul an dorojou ,  
 Ur marmous pintet clos var bord ar prenestou .

Ur haro er jardin , adversour d'al louzou ,  
 Mar dit en eur goele , c'houi en ampoesono ;  
 Da antren en matier nemet commanç na ran ,  
 Ret eo din-me prouvi ar pez a avançan .

Guechal en eur sermon , Sant Bernard a lare  
 Gant calz a eloqanç coulz ha gant guirione ,  
 En devoa ar graguez guinou an drouc-speret ,  
 Ar memes tra iveau a lar eus ar merc'het .

Er Genes , chabistr tri , e commanças Eva  
 Da zebri'n tam aval , da bec'hi da guenta ,  
 Hi e deus hor c'hollet , hi so caus d'hor maro  
 Temporel hac eternel , ha d'hon oll maleuriou .

Goell è bez'en dezert etouez an oll loënet ,  
 Pe er vroyou sovach emesq ar barbaret ,  
 Eguet chom en un ti gant ur vreg e coler ,  
 N'en deus netra quer goas er bed oll en antier .

Ar merc'het , ar graguez a so oll traou dister ,  
 Envel eus Tisiphon , Alecto ha Mejer ;  
 O chalon , o zellou , so evel roejou ,  
 Hac o daouarn goude evel eul liamou .

Piou benac a c'houlen plijout da un Doue ,  
 Gant soign ha dililianç a bellai dioute ;  
 Ar pec'her maleurus d'o c'havet a deuyo ,  
 A guezo hep dale , siouas , en o laçou .

Clévit Sant Augustin o comz eus aneze ,  
 Doctor bras en Ilis hac o anaveze :  
 Pebes objet dister ar vreg evit un ozac'h ?  
 Assur gant guirione ne alfe qet e nac'h .

Ouspen int carguet c'hoas a infidelite ,  
 Eus a ambition hac a impurete ,  
 Eus a ingratiri e qever peb-unan ,  
 Ha den hepken na estim nemert-y e-unan .

Ar Profet bras Jonas , gant ur balen longet ,  
 En e gorf pad tri de a oue guell preservet  
 Eguet ma oue Samson o conta e secret  
 Da Dalila e vreg , pa oue quer trahisset.

Sant Yan ar Badezour a oa bet respectet  
 En desertjou guechal , memes gant an tigret ;  
 An oll loënet gouez a duee d'e cherissa ,  
 Biscoas ini anê na eure droug dezâ.

Mes pe seurt differanç dirac Herodias ,  
 Goude beza danset , an draïtoures , siouas ,  
 Roet e voe dezi ar pez a garje da choas :  
 Sant Yan voa ar victim , e benn a c'houlennas.

C'hoas Sant Yan Chrisostom , bars er chabistr naovet  
 Demeus a Sant Vaze , a deu da lavaret :  
 Ar plac'h en guirione a so dor an ifern ,  
 Hent an iniqite , daonet qiq hac esqern.

Gouli ur scorpion , da behini n'eus qet  
 Er bed universel cavet dezân remet ;  
 Un droug so guel noazus ha domajus dre oll ;  
 Tol plêt partout raze , n'ouffent nemet da goll .

Selaouit Sant Gregor e posi e gomzou ;  
 Laqit evez oute , evit m'oc'h instruo :  
 Ar plac'h e deus , emezân , oll belim un aspic ,  
 Teod serpent ha toussec , daoulagad bazilic.

Finesse an dragon , al loënet dangerus ,  
 Ha c'hoas ur plac'h a so calz muioc'h maleurus ;  
 Ne deus ezel ebet na ell rei ar maro ,  
 Ne vo lazet ganti nemet neb a fio.

Consultomp Origen var buez ar merc'het ,  
 Petra laro demp-ni ? o deus qenta pec'het ,  
 E zint ar monstr Satan e deus hor chasseet  
 Demeus ar barados , elêch ma voemp crouet.

En ur guir , ar merc'het o deus an oll viçou ,  
 Bulumus maleurus demeus hon oll finiou ;  
 Int o deus da guenta trasgresset al lezen ,  
 Trompet hon Tad qenta ebars jardin Eden .

Brassa maliç an den , mar be comparachet ,  
 Ha laqet er valanç , evit beza poezet  
 Gant œuvrou mad ur plac'h , memes e œuvrou guella ,  
 N'en dint qet quer bras drouc ha ma è ar re-ma.

Mar selaouan Caton , e teu din da laret :  
 Ar furnez , ar rëson ne dint qet d'ar plac'het ;  
 N'ellont o fosseidi james en o c'halon ,  
 Ha n'en dint netra oll nemert ambition.

Sant Jerom a lavar : ur vreg vad er hed-màn  
 Zo evel ur Fenix n'en deus qen nemertan ;  
 Hac ur vreg vad ive , mar be cavet hini ,  
 Me so sur er bed oll ne vezò nemeti.

Tertulien guechal , den habil ha savant ,  
 O comz eus ar merc'het , a lavar excelant ,  
 O deus ar gassoni demeus an diaoulou ,  
 O maliç , ho bulum hac o goel-oberiou.

N'en dint certen netra , mar bent comparachet  
 Gant maliç ar grague hac hini ar merc'het ;  
 Rac an diaoul a noaz dreizan e-unan ,  
 Hac ar merc'het er gra dre buiisanç Satan.

Na lavaràn netra na ell an oll da c'hout ,  
 N'en deus netra ebet na laqin da dalvout ;  
 An douar , an ifern , ar bed oll , o armou ,  
 O maliç o-unan birviqen ne vanqo.

An Ecclesiasti a lar hac a assur ,  
 Var cant den so cavet un den mad , un den fur ;  
 Mes etoues mil ha mil demeus an oll merc'het  
 Biscoas hini er bed ne zeus gallet cavet.

An den fur ha savant , ar philosof Caton ,  
 A rente graç da Zoue eus a greis e galon ;  
 Dre ma voa bet ganet etoues ar romanet ,  
 Ha nonpas en plaç all e creis ar barbaret.

D'an eil , m'oа partajet demeus calz a rëson ,  
 Evit gallout servich oll dud e nation ;  
 D'an drede ma voa bet grêt goas ha nonpas plac'h ,  
 Exant eus a valiç evel m'è peb ozac'h.

Pithagoras guechal pa voe interrojet  
 Perac e roe e verc'h d'un den gantân cassêt,  
 A respondas qerqent hep nep difficulte,  
 N'alle en em venji guelloc'h eus an den-se.

Gout a ouie ervad n'eus netra qen noazus  
 Egouet ur femelen , na qen malicius ;  
 Diaoulou int en ti , un tourmant int er mès ;  
 Ne reont nemet brezel , disput en tieguez.

Goas int egouet brezel , goas int egouet bossen ,  
 Mil maleur er bed-mâo a occasion o fenn ;  
 Eus autor ar chanson , m'ho ped na fachit qet ,  
 N'en deus netra avancet hep beza goarantisset.

### F I N.

---

## IMPERFECTIONOU AR GRAGUEZ.

*Var un ton grignous.*



**N**e oun ha me a gretfe disclêria ar secret  
 An imperfectionou eus ar femeleset ;  
 Gouscoude pa en sonjân e rân ur goal affer ,  
 Droug grêt e vo qement-mâ , ne oun petra ober.

Mar am bez ur reprimant , pebes displijadur !  
 Dre ur chanç droug avancet , hac un tol dinatur ,  
 Var ar scritur ancien , pini e meus lennet ,  
 E cavâu meur a voaran var ar memes sujet.

An eol , tad ar sclêrijen , a zeu d'en em guza ,  
 Al loar eo ar femelen a zeu da zispaca ;  
 Houma a so imparfet , sujet d'ar chenchamant ,  
 Evel ar fumelezet dre o zamperamant .

Ur galon avarisdet ha penn ur fumelen  
 A eller comparachi ebars en peb termen :  
 A viscoas e zint calet , muioc'h eguet simant ,  
 A zo cos a vil maleur erru communamant.

Ur blijadur dommajabl , hac un droug necesser ,  
 A zo dre ar bed mouvant e laqat ar vizer ;  
 An alc'houez hac ar sourcen a imperfection ,  
 Hac an doriou an amzer ebars en peb sezou .

Béleg memes sant Gregor , un den qen eloquant ,  
 E galv iveau un aspic ha goal deod ur serpent ;  
 Un dragon dre e fulor , pa vez mui animet ,  
 A guev so dre e sellou goell eguet greg coleret .

Maliç ur vreg a surpas maliç an diaouloù ,  
 A lavar Tertulien ebars er scrituriou ;  
 James ne vanq femelen , mar bez contrariet ,  
 Da glasq sicour da venji , mar guel , e nep sujet .

Me a guev ur femelen , dre e mondanite ,  
 Haoval bras eus ar fleuren eus au antiquite ;  
 Pa erru ur voenannen da biqat e deillou ,  
 En em lez da dissipia evel ar simpla louzou .

Ne ouffe biжен ur goas beza falloc'h partajet  
 Eguet rancontri da bar ur femelen diboellet ;  
 Cuza ra'n iniqite dindan ur c'horf mignon ,  
 O c'hortos al liberte da fumi en dragon .

Me ne gavàn qet estranch guelet ur femelen  
 Ne gener gant netra tout , familier ouz peb den ;  
 Mes ur spullen droug placet , var un habit a fent  
 E laqayo da c'hoognal ha da scrignat e dent .

An oll montagnou tortu , discaret oll a c'hoen ,  
 Hac an hentchou sabronus rabotet oll en plen ,  
 An oll deillou er c'hoajou mil dest betec al loar ,  
 Carillon ur plac'h a dempest a bompe an douar .

. Ebars marc'hajou follet ha foariou Cupidon ,  
 E mesq an dud assortet , an Doue forgeron ,  
 A stign e oll roejou evit destum e sec'h  
 Ar re a so re frajil gant ar femelezet.

Selaouit : *Optima Femina rario Phœnice* ,  
 A lavar c'hoas Sant Jerom d'ar merc'het ha grague ,  
 Qer rar evel ur Fenix eo ur femelen vad ,  
 Evel m'en deus remerget en un andret benac .

Bars an naontecvet chabistr demeus a Sant Vaze ,  
 C'hoas ur Sant Yan Chrisostom a gomz eus ar grague ,  
 O henvel dor an diaoul . Ur vreg insuportabl  
 So evel ur scorpion e pep tra domajabl .

Jonas a voe assuroc'h ebars corf ar balen  
 Eguet ne voa bet Samson dirac ur femelen ;  
 Ar Prophet a gof ar pesq heb outrach a guitta ;  
 Samson a golle e oll nerz en daouarn Dalila .

An tigret , al leonet , ha calz a loened goe ,  
 A enore sur Sant Yan pa voa var ar bale ;  
 Ha gouscoude e veler penaus ur femelen  
 E deus an ingratiri d'ober trêch'i e benn .

Ma velfac'h bisach Cloris , pa ve fachet Colin ,  
 Efaut da vez a muguet an dour var e melin ,  
 E sollicito'n énvou dre vœuyou impuissant ,  
 Da derri ar chadennou a so cos d'e zourmant .

N'o deus , daou zen demezet , nemet daou de contant :  
 An deiz demeus an euret ha deiz an enterramant ,  
 Rac ur c'hontrat da garet dre obligation  
 A deu prest da enoui en e possession .

Deut eo mouez an durzunel ha ramach ar goucou ,  
 N'en deo qet ret déc'h bremâ grillat hoc'h ivinou ;  
 Dalc'hit ur c'houbl balinou abars ar goan calet ,  
 Evit ar merc'hedigou o-unau da gousqet .

Bisach ur vreg e coler so evel ur sac'h glaou,  
 Sellou du, un tal ridet, ne laràn qet a c'haou,  
 Evel m'ê sellou un ourz furius, trañsportet;  
 Penaus ec'h alfe ur goas beza falloc'h partajet?

Pa vo ebars en ilis, vo evel ur zantes,  
 Hac un aël dre ar ruyou, diaoul en tieguez,  
 Ur sparfel en ur prenest, ur bicq var an treujou,  
 Ha dirac e goaz tiec goal hir e muzellou.

Clasq a reont peb ardou da zeboch ar voaset,  
 Darn anê dre o moueziou ha darn all o prezeg.  
 Alies mouez ar siren en em rent danjerus,  
 Dont a ra en un instant an amzer orajus.

Ar vreg, princip ar pec'het, dreizi e leveromp,  
 Evel ma eo rapportet verset tri ha trégont.  
 Poent e cavàn finissa, amplic am eus comzet,  
 Ne larin mui davantach, rac aon ne vent fachet.

Gouscoude e guel demezi eguet dont d'ober voaz,  
 Rac beva var ar gommun a so danjerus bras;  
 P'ho pezo choazet ur par, dalc'hit fidelite,  
 Qercoulz etoues ar vizer vel er brosperite.

Ma welfac'h an durzunel o tont da goll e far,  
 En em lezel da goueza divar beguig ar bar,  
 O serri e daoulagad eus en em soupira,  
 Hac huanad an adieu a deu d'en finissa.

**FIN.**